

MARTOLODET BREIZ-IZEL

gant kaner brudet ar brez IFIG MOAL

I

E. Breiz-izel, z' euz martolodet
Ne reon ket a vilou V. botred
Pa vezon pell diouz an douar
War bordik an enez
Et sonjont aliez er gear
War bordik an douar.

II

Ne zeuz ket par da vretoned
Gwelit ta ar vartolodet.
E kreiz an noz er wal amizer
E vezon laouen a seder.

III

A pa gwiteon ar merc'het
Neuze o devez poan sparet
Djez vez lavaret : Kenavo
Evit mont varzuk ar pell bro.

IV

Pa zeon varzuk an mor doun
Neuze o devez poan galon
Kuitad a reon dizou si
Vezon ket sur da zisrei.

V

Pad ma vez an dud n'kousket
E kreiz an noz e vezon klevet
O kana eur zon dudius
Ar martolod a zo eurus.

VI

O gwiškaman a zo brao
Ar merc'het zo pitill ganto
Rak evit beva dizoursi
D'eur martolod eq dimezi.

VII

Evelise ta merc'hidigou
Pa vo en o ti ar gouleennou
'Vit beza eurus er vuez
D'eur martolod bezit maouez.

PABOR KASTELL

Friko Jakou, ar paotr fur

Jakou hirio zo dimezet
Gant er plac'hig fur a koant
E....? eo fortuniet
C'hoarzin, t'hoarzin a rankan.

III

Biken vez en ostaleri
Ne gay ket mad e vanne
Ne vez ket gwélet e fumi
Sethu er paotr a zoare.

IV

An hini à velfe Jakou
D'ar zul vont d'an oferen
A da c'houde er gousperou
O kana a vouez e penn.

V

Met hirio 'vit friko Jakou
An holl zo bet souezet
Great en deuz en e vagou
Ar paotr fur pa dirollet.

En dervez ma oa ar gouleennou
Mari a d'oa plijadur
Kaout a reaz dezi Jakou
E ini koz a ioa fur.

VI

Oh! a lavare Mari
Pe seurt den em euz paket
Kaout a reaz din dimezi
Gant ar furra diouz ar botred.

VII

A pa ya poent mont da gousket
Mari a ioa truezus
Rak pa oa Jakou divisket
An daolen a ioa farsus.

VIII

A Jakou er gwele kloz
A gantan serret an or
A war ar bank e ini goz
Zo c'houlén, c'houlén digor.

IX

Diouz ar mintin o tihuna
Jakou a jomas mantret
O kleyet Mari o oela
A gant truez o lavaret.

X

Hag er meaz diouz e vele
M'o piche gwelet Jakou
O pec'hie war'zent a Doue
Pa zellaz diouaz e vagou.

XI

Bremen evit echui
Selaouit merc'hedigou
Araok deoc'h dimezi
Diwallit diouz er Jakou.

DISKAN

Jakou zo en den dirollet
Holl gantan zo bet tromplet.

PABOR KASTELL

Evit ar friko, gouleennit... IFIG hag e vuzik